

KIS-666 – Gl. séquençage

(JE da GE – 31 01 00)

Penaos e trofec'h : “*Le séquençage du génome de la lèpre*” ?

(GE da JE – 01 02 00)

En Hiloniezh ez eo Gl. *séquenceur* kement ha "savelañ ar c'hemalennoù molekul a ya d'ober ar genom", Br. *kemalañ*. Gl. *séquençage* a c'haller enta treiñ dre Br. *kemalañ* pe *kemaladur*. Ar bomm a venegit, Gl. *le séquençage du génome de la lèpre*, a zegouezhfe e Br. *kemaladur genom al lovrezh*.

Un nebeut evezhiadennoù :

~ Ur ster all a c'haller klevout gant Br. *kemaladur* : "an urzh he unan o ren etre an elfennoù a ya d' ober ur gemalenn" (n'anavezan ket ar c'hevatal gallek er c'hemeradur-mañ, *séquençage* moarvat).

~ Ur ster all a c'haller klevout gant Br. *kemalañ* (ouzhpenn an hini despizet a-zioc'h : "stadañ ur c'hemaladur") a zo : "aozañ ur c'hemaladur".

Aze e ranker mont d' ul live hollekoc'h a zo hini ar Ouezoniezh. “Savelañ ul luniadur” a c'haller intent e daou zoare : *a*) e par an anaout : dizoleiñ ul luniadur en traoù, a zo kement ha sevel al luniadur-se er reiz, da skouer derc'heilañ ur volekulenn e reiz un delvan, *b*) e par an ober : gwiriañ al luniadur savet er reiz, an derc'heilad, dre e adsevel en traoù, e werc'heilañ. Hevelep tremen eus *a*) da *b*) zo argerzh boutin an Alvezoniezh : war-benn gwiriañ dikted deskrivadur ur volekulenn e stager d' he c'hevanaozañ. Un trede hag ur pevare lankad zo : *c*) dre loc'hañ diwar un derc'heilad, ijinañ luniadurioù nevez, handerc'hañ molekulennoù digent ha *d*) o c'hevanaozañ, eleze degouezhout gant hanwerc'hadoù. Skoueraet eo an argerzhioù-se gant istor ar bevastalerioù : ar bevastalerioù kentañ, ar penikilin da skouer, oa anezho molekul bezant en natur ; da gentañ en o goubared eus ar meteier ma edont bezant ; da c'houde e voent kevanaozet diwar o derc'heilad, gwerc'heilet ; erfin, diwar handerc'hadoù e voe kevanaozet molekul nevez, hanwerc'hadoù anezho.

Un avantur heñvel zo o c'hoarvezout en Hiloniezh. Ur wech kemalet ar genoù, eleze derc'heilet o luniadur e rezh delvanoù, e fell da imbourc'herion 'zo o gwerc'heilañ ha dreist-holl degouezhout en dibenn gant genoù hanwerc'hat. En diarsell-se e wisk ar verb *kemalañ*, ouzhpenn ar ster "dizoleiñ ar c'hemaladur", ar ster "aozañ ur c'hemaladur" gwerc'heilat pe hanwerc'hat — ar pennanv deveret diwar *kemalañ* er ster-mañ diwezhañ o vezañ *kemalerezh*. Mar bez ezhomm kaout verboù resisoc'h, e c'hallor bepred luniañ deveradoù evel *hangemalañ*, *treuzkemalañ*, *kemalata*... A du 'rall, mar korvoomp loazioù ar brezhoneg kempredel a lak kemm da skouer etre *Yezhoniezh* ha *Yezhouriezh*, e c'haller diforc'hiñ an *Hiloniezh*, studi ar genom, diouzh an *Hilouriezh*, gwezhiañ war ar genom.

Evel a ouzoc'h, ar verb *séquencer* a arverer ivez er Stlenneg gant ar sterioù
a) "savelañ natur hag urzh lankadoù ur gwezhiadur", Br. *kemalañ*, *kemaladur*,
b) "arc'hañ, hervez un urzh amzerel lavaret, al lankadoù a ya d'ober ur gwezhiadur e doare da sevel ur goulev", Br. *kemalañ*, *kemalerezh*.